

## Gant ar brezhoneg e vin divyezhek !

Abaoe ouzhpenn 40 vloaz ez a ar c'helenn divyezhek galleg-brezhoneg war-raok. Muioc'h-mui a familhoù a ra an dibab-se evit o bugale bep bloaz. A-drugarez d'un hentad aozet eus ar skol-vamm betek al lise e c'hell ar skolidi mestroniañ ar brezhoneg, ouzhpenn d'ar galleg, ha gant se e vint muioc'h en o aez en o endro pemdeziek.

Diwezhatoc'h ha dre o divyezhegezh e c'hellint labourat e Breizh, ma'z eus muioc'h-mui a bostoù ma'z eo ret komz galleg ha brezhoneg, koulz war tachenn ar c'helenn, ar vugaligoù, ar buheziñ sokiosevenadurel, an embann, an touristerezh, ar mediaoù, ar strollegezhioù, ar yec'hed...

Gant un divyezhegezh sanket don er vro e vint gwelloc'h en deskiñ yezhoù estren ivez. Ouzhpenn 600 skol zo gant un hentad divyezhek dija ha bep bloaz e vez digoret re nevez. Da lakaat anv ho pugel er skol dostañ, kit war al lec'hienn **ww.ecole.bzh** pe pellgomzit da Ofis Publik ar Brezhoneg da **02 51 82 48 35**.



## Grâce au breton, je serai bilingue !

L'enseignement bilingue français-breton est en plein développement depuis plus de 40 ans, chaque année de plus en plus de familles choisissent cet enseignement pour leurs enfants. Grâce à un cursus organisé de la maternelle au lycée, les élèves maîtrisent le breton, en plus du français, ce qui leur permet de mieux comprendre leur environnement.

Plus tard, leur bilinguisme français-breton leur permettra notamment de rester travailler près de chez eux en Bretagne, où de plus en plus de postes requièrent la maîtrise des deux langues dans des domaines divers comme l'enseignement, la petite enfance, l'animation socio-culturelle, l'édition, le tourisme, les médias, les collectivités, la santé...

Ce bilinguisme ancré dans le territoire leur facilitera également un meilleur apprentissage des langues étrangères. D'ores et déjà, plus de 600 établissements sont dotés d'une filière bilingue, et chaque année de nouveaux sites ouvrent. Pour inscrire votre enfant dans l'école la plus proche, rendez-vous sur le site **ww.ecole.bzh** ou contactez l'Office Public de La Langue Bretonne au **02 51 82 48 35**.